

SON AIR BIRIEZIEL

I

Breudeur, me ho salud gant ma brasa respect,
Pa ret d'in an enor da zont holl d'am c'hlevet ;
An amzer a zo trist, ma c'halon zo ive,
Hon foaniou zo kalet, plijet klevout ane.

II

An histor zo trajic, vit hen larout ervat,
Ma spered zo dinerz, met ho kalon zo mat ;
Rakse ma digouez d'in mankout ekreis c'hoari,
Me 'zo zur diouzoc'h holl da zont d'am pardoni.

III

Gant arrach hag anken n'imp a oa pennfollet
D'an eur m'oa ar brezeleur wech c'hoas diskleriet,
Kleier, leun a c'hlae'har, a oa kroget da son
An ton ken alamus a mobilisation.

IV

Trist ha kalet a oa lavarout kenavo,
Met tristoc'h 'oa kalz c'hoas mont dirag ar maro.
Kuitaat ar gaer a bouez war ar galon nerzus,
Mes kuitaat ar vuhez zo dei eun dra euzus.

V

Lavarout ho peuz de : « Kenavo, chans, yec'het,
Ha gwellan grass Doue woar o kiz da zonet. »
Ho c'halon d'oa fizianz o klevout ho menat,
An tennou hag an tan dioutan reje goap.

VI

Kreiz ar walen a vez eul loden espernet,
En ho mesk e kaver tud planetenn gallet,
Trist eo koll ar yuhez pa ya ar goad da goll,
Rak ar gwad zo skuillet a zo dismantret holl,

VII

Ar Frans 'neuz imbannet pegen izell e oa
An enor memp kollet 'noket savet 'neur bloaz,
Mes, mar fell d'imp breman sonjal en hon foaniou,
Ni, zur-mat, hatkavo hon flass mesk ar broiou.

VIII

Doue, tad eternal, mestr an env, an douar,
Sellet ouz ar galon a zo enni glac'har,
Plijet d'ac'h, me ho ped, dre o kwir providans
Rei d'ar brisonerien nerz, kalon, ha fizianz.

IX

Sonjet ta, mignoned, kavant hir an amzer
E sonj an tiegez a zo manet e ger.
Gwellout 'rant bugale, n'int ket siouaz o re
Kri kaer eo ar galon na gemer ket truez !

X

Al lapouz a return pa deu nevez amzer,
Hennez zo diaskell mab Adam, ar pec'her,
Pa deu ar bleun er c'hoat hag an heol lugernus,
Buhez ar prisonier zo bopred hirvoudus,

XI

Na n'eus nemet eun dra 'chellfe o c'honsoli,
Kelou mat ous ar ger ha gantan eur c'holi,
Bezomp holl karantez ha mat en o c'henver,
Ha pedomp evite ma returnfont d'ar ger.

XII

Respect am eus d'ac'h holl, met priset am c'hlevet,
Pez 'zo deuet em spered me vo ret d'in laret
Me ho suppli, merc'het, na vet ket re estranj ;
Bezet sonj ous ar re 'neus bet ho allians.

XIII

Pelloc'h e yelo c'hoas ma resolution,
Daoust ha na blijo ket d'an dud holl ma raison,
Eur galon divroet, goude-se ankouaet,
A zo prest da vervel, Malloz d'it gwall bried.

XIV

Pa 'man er bed kouezet 'neur seurt tristidigez,
N'eman ket d'ac'h ar c'houlz d'ober ho itronez,
Breman he kemeret ho holl bras plijadur
Aüs d'ho penn, ar maro a yud trist ha hudur.

XV

Argalon 'zo hep boued pe beus c'houi en abundans.
A lavar 'och hu c'houi gwall indign ous ar Vrans,
Mar 'peuz klasket sevel ho yalc'h diwar ar paour.
Kont ho po da renti : ar paper n'eo ket aour.

XVI

Me a get kompagnonez eve troublet ma memoar,
An defot da gemense a finissan an histoar,
Me o ped o vadelez da zont da m'ho exkusi
Mar 'na meusket gallet plijout da peb hini.

XVII

Bevomp holl, ma zud vat, gant eur galon leall,
Ha Doue 'savo c'hoaz ar vro hanvet Bro C'hall,
Pa vo fin d'ar walenn, ma c'halon vo laouen,
Ha joaüsted a vo eun c'hentan kanaouen.

Yves LE GOFF,

à Kergoguen, Plougonver (C.-du-N.)

(Tous droits réservés)